

# Guerhies Vari a Garnasen

Argt: G.A.

## Refrain

Sopranes  
Altos  
Ténors  
Basses

Guer-hiéz Va-ri a Gar-na-sen Groeit ma vou kleu-et hur pe-den get

5

Jé-zus hou mab be-ni-get ma ve-emb ol er fin sal-vet. Che-leù-et ol me

Couplet

10

Jé-zus hou mab be-ni-get ma ve-emb ol er fin sal-vet. Che-leù-et ol me

15

hou su-pli Ur huer-zen kaer é zis-klé-ri Dam a ve-ri-teu glo-ri-us Er

Hué-ries Va-ri Mam Jé-zus.

Répertoire GEDOUR AR MINTIN  
Tous droits réservés  
Partition diffusée par [www.kan-iliz.com](http://www.kan-iliz.com)

3

An eil a viz c'houevrer  
De ouël ar Chandelour,  
Leiz a dud a gaver,  
Daoust d'ar pri ha d'an dour.

4

Ha d'ar sul kenta est,  
Ve lidet ar pardon,  
An holl, mevel ha mestr,  
A zisken en hent dôn.

5

Bep sul, epad miz Maë,  
Aliez 'kerz an hanv  
Tigaser bugale,  
Re yac'h koulz ha re glanv.

6

Ra zav pedennou braz  
Gwalen pe klenvejou  
D'ar chapel reder c'hoaz  
Vit pellaat ar reuziou.

7

Neb a bed ar Vam vat,  
Daoulinet ha doujus  
A c'hône e vennad  
War he c'halon karus.

8

Er parroujou trô-drô  
Da Werc'hez an Dancuët,  
War töl-spont ar maro  
Ar c'hlanvour 'zo gwestlet.

15

Vel breman ni gano  
Meulodi d'ar Werc'hez  
Mil bennoz d'he hano  
Enor d'hon Patronez .

9

Meur a vuzud dispar  
Kuzet hag embanet  
Zc c'hoarveet, hep mar,  
Er chapel vinniget .

10

Vit mirout ar gwenan  
Ha kreski o rusken,  
Kaser golo gwen-kan  
Itu ha koar melen.

11

Ken kuitaat e gerent,  
Ar zoudard ankeniet  
Gemer buan an hent  
Hent Chapel an Dancuët .

12

Ar Vam 'c'houl d'he bugel  
Badeiant ha buhe  
Dont a ra d'ar Chapel  
Da laret " Trugare " .

13

D'hon Mam, Boulvriagiz  
Touomp gwir garante,  
Ha miromp holl ar c'hiz  
D'he zaludi bemde .

14

Goude barn hon Zalver  
C'houi 'vc ouz hon gortoz  
Evit hon digemer  
Toul dor ar Baradoz .

1. Cheleuet ol mé hou supli  
Ur huerzen kaer e ziskléri  
Darn a vériteu glorius  
Er Huéries Vari Mam Jézus.
2. Biskoah Mari ne huës bet par  
Nag barh en nin nag ar en doar  
Ken karet ha ken inouret  
Get Doué en tri Person sakret.
3. Hui e, Mari, zou konseüet  
Puran kréatur zou barh bed  
Na saçan na péhed erbet  
Biskoah berh arnoh n'en dës bet.
4. Hou puhé zou bet ken santél  
Ma oh bet choéjet get en El  
A berh en Drinded beniget  
De vout Mam de Salvér er bed.
5. Pe vé splannet, er burudeu,  
Groeit barh hanton dré hou kréseu  
Me lar hardéh Guerhiës santél  
E vé mui hantet hou chapél.

6. Ré varüe e huës ressuscitet  
Ré dal en dës bet er guéléd  
Ré e oë mud en dëd konzet  
Hag er kam en dës kerhet.
7. A huerso é ma bet laret  
Gréseu jamésd n'en dës manket  
De gement en dës chervijet  
A galon er Huérhiës sakret.
8. Keméramb kalon kristénion  
Ha kreskamb hun dévosion  
E kevér Mari beniget  
Aveit bout get-hi sekouret.
9. Me bromet d'oh ô me Intron  
Hou chervij a greis me halon  
Em bout aveit oh karanté  
Epad ma padou mem buhé.
10. Intron Vari a pe vou ret  
Kuitat ha dilézel er bed  
Groeit d'emb kavouët én hur halon  
Ur guir ké ha kontrision.